

JUSTIZ EVIT SEZNEC



Son da ion savet gant François STÉPHAN Eostik Kreisker:
deuz Kastel-Paol.

A la memoire de Madame SEZNEC et de sa fille.

*En hommage d'admiration pour l'écrivain distingué
E. Delahaye, défenseur de Sez nec, directeur de "La Province"*

*A la gloire du magistrat intègre Ch. V. Hervé,
préférant l'abandon d'une brillante carrière à l'asservis-
sement de sa conscience.*

F. S.

1

Breman ez euz eiz vloaz e Lez-Varn-Veur Kemper
E oe barnet Sez nec tamallet 'giz muntret
D'ar galiou da viken ez eo bet koundaonet
Met du-hont e Kayen eo laouen e spered.

2

Laouen eo o sonjal e teuo dizale
War hentchou Breiz-Izel, adarre, da vale
An holl a oar breman Sez nec a zo divlamm
Hag goulenn a reer holl terri eul lezen-gamm

3

Sez nec ha Quéménéur, a ioa daou vignoun braz
Met eun deiz Quéménéur, allas! na zistroaz
War Sez nec, evit gwir, e savaz an tabud
Hag muntret hep digoll, oe kountet gant an dud.

4

Doue hor barno holl, ha Sez nec er prizoun
A lavare bepred oa dinec'h e galoun
Lavaret a rea, e goustianz seder
«Va zamall a-rit holl!» «M'hen tou! n'oun ket
[muntret !!]»

5

Testou o doa gwelet Quéménéur, dre ar vro
Warlerc'h ma oe kountet, gant ar Justiz, maro
Ar re ioa bet galvet, n'oant ket bet Kredet
Re-all 'doa her gwelet, n'oant ket bet galvet.

6

Goulskoude e Traou-Nez, e parrez Plourivo
E maner Quéménéur, en eun nosvez garo
E oe trouz ha tennou, redadeg ha safar
Quéménéur, marteze, a gouezas. Piou a oar?

7

Testou? martoloded hag a oa diskennet
Hed ar ster gant o bag, hag o devoa gwelet
Eun den o tec'hed trumm, hag war e lerc'h daou-all
Eun tenn sec'h da genta ha goudeze eun-all.

8

Pa oe Sez nec e beac'h merdeidi Plourivo
A iez da gounta o gwel, holl war eun dro
D'an archer, d'ar Barner, ha distro en o zi
O c'houstianz e peoc'h e veschont dizourzi

9

Siouaz! o zesteni a gostez oe lezet
Hag e Traou-Nez morse enklask na oe savet
Sez nec oe, el Lez-Varn barnet e berr-amzer
Hep dale d'ar «Guyane» oe kaset ar Merzer.

10

Epad ma oa du-hont, en ifern ar c'hrisa
E c'hreg paour, eur santez, a glask na petra-ta
Azdigeri effer savetei he Enor
War an douar heptan? Red eo, mervel kentoc'h!

11

Met ni holl, Bretoned mignoned d'ar Justiz
C'hell goulenn diganti ma sello mad ha piz
Ouz an testeniou oe kinniget d'ezi
Eur seurt tra ne c'helfe neimet he enori.

12

Eur barner kalonek hag eur skrivagner braz
A red dre Vreiz-Izel hag zoken pelloc'h c'hoaz
Evit diskouez d'an holl en o bodadegou
Penaoz c'hell ar Justiz n'em drompla awechou

13

D'eomp gant tizianz d'ho heul, hag goulennomp
Ma vo ar Justiz eun, ha karet en hor Bro d'hon tro
Vit Sez nec, e diegez, hag ar Justiz gwirion
Savoimp-oll hor mouez! War zao, tud a galon!!!

(Reproduction interdite).